

**BENEDICSION**

**CHAPEL NEVEZ TREZIEN**

**E PARREZ FLOUARZEL**

10 a viz Mae 1877

---

Var don : *Lez-Breiz.*

---

1.

Canomp en eur vouez, canomp, kristenien.  
Gloar d'hor patronez, Introun Trezien. *bis.*

2.

Ar feiz en Arvor biken ne varvo ;  
Ma n'her c'hredit ket, deut ama hirio. *bis.*

3.

Deut da Blouarzel, d'an draonien distro  
E tal ar mor braz, Trezien he hano.

4.

Eno eur chapel, enor ar barrez.  
A zo benniget gant calz levenez.

5.

Coant ha direbech, din a vam Doue,  
Chapelic nevez, piou 'ta n'az carfe ?

6.

Douar burzuduz gant Mari caret,  
Te zo e Leon dre vir vad brudet.

7.

Pa c'hoez an avel, merc'hed an Arvor  
'Vit eul lestr caret a c'houlen goudor.

8.

Ar martolet paour ne c'hell mui, siouas !  
Torret guern ha stur, he ren er mor braz.

9.

D'ar garrec ez a !!! Nan, nan, ar Verc'hez  
'Ra var al lestric eur zell a druez.

10.

O vont da veuzi, ar vartolodet  
A zo da Vari oll en em voestlet.

11.

Kerkent eo couezet counnar an tarziou,  
Ar verelaouen a bar en envou.

12.

Eun tad, eur bugel, eur breur, eur pried,  
D'ho c'herent euruz iac'h-pesk zo rentet.

13.

Da zeiz ar Pardoun deut oll d'ho guelet ;  
E ti ho Mam vad ez int daoulinet.

14.

Arvor da Vari a ro carantez,  
Caret eo ive e barr ar menez.

15.

A bep tu guelit kristenien fidel  
O tont d'he meuli betec he chapel.

16.

Enor, trugarez da Voeled Leon,  
Trugarez dreist-oll, enor d'ar c'hanton !

17.

Oc'h peb seurt encrez a gorf, a speret,  
Mari, mam dener, c'houi o peuz remed.

18.

Prisounier guechall e bro an Turket,  
Eur zoudard kristen en deuz ho pedet.

19.

Digor he brisoun, torret he jaden,  
Eharz oc'h aoter e tihun souden.

20.

Da beden eur vam, askell ar maro  
Dioc'h eur bugel ker buhan a zistro.

21.

Epad hirr amzer eur c'heaz clanvour  
Digant tud guesiec a c'hede sicour.

22.

Goulennet en deuz mont d'ho ti, Mari,  
Ractal eo cresket nerz he izili.

23.

D'ann ene kristen ar c'haera tenzor,  
C'houi oc'h euz miret vertuz hag honor.

24.

E Lourd, er Saleet e rit miraclou  
Evit da Jesus gounit eneou.

25.

Gant fisians ive, guir belerinet,  
Ni ho ped hirio; Mam, hor zelaouet!

26.

Mam a vir zicour, Introun Trezien,  
Diouallit ar Pab, Tad ar gristenien!

27.

Mam drugarezuz, Mam a esperans,  
Diouallit hor bro, rouantelez Frans !

28.

Grit d'eomp ato, er bed 'n eur dremen,  
Senti ous Doue, caret he lezen !

29.

Sur euz ho scoazell, en eur har maro,  
Da lezvarn Jesus scanv ni a gerzo.

30.

Evel eur goulmic o vont da repos  
Hon ene 'nijo eun d'ar baradoz.

EUR PARDOUNER.

PERMIS D'IMPRIMER.

Quimper le 30 avr<sup>il</sup> 1877.

J. JEGOU, vic.